


56

AR SPILHEN.

— par l'abbé Le Roux,
curé de Plouyéde avant la Révolution +



E MONTROULEZ,
Eus a Imprimiri V. GUILMER.



AR SPILHEN.

Y_A, gat eul lomic guin guen
Bete anter va gueren,
Var begc eur spilhen e rafen
Eur son quëit hac eur goalen :
Chetu va lomic guin evet,
Chetu va son comancet.

C'hui oll pere a ra spilhou
Hac ho rencq a gouchadou;
C'hui oll pere dre ar foariou
A ren, a vers, a bren spilhou;
Sicour;.... c'hoant a so e rafen
Eur son var begc eur spilhen.

Pourmenit dre an oll broyou,
 E peb leac'h eus spilhou;
 Spilhou aour, spilhou arc'hant,
 Spilhou var alc'huet livet coant,
 Ha spilhou bras, ha spilhou crenn,
 Spilhou du, spilhou melen.

E peb stad hac e peb amser
 Ar spilhou so necesser :
 D'ar varquises, d'ar rouanes,
 D'ar baoures-ques artisanes;
 En nos qer couls has en deiz,
 Er c'hosni, er yaouanctis.

Pa za Jannedic d'an dansou
 Ractal e clasq e spilhou :
 En e c'huef e laca peder,
 Ha tēir en e mouchouer;
 En e brenniden e laca
 Spilhou, spilhou hep conta.

Avechou oll labour an den
 A zepant diout eur spilhen :
 En ho taouarn pa vez un dren
 E carfarc'h e lamet souden;
 Gat petra e lamet an dren?
 Nemet gat becg eur spilhen.

Carguet ar c'hornad ha tanet,
 Mar stourm chetu c'hui nec'het ;
 Ma ne ro avel ho piben
 E chachit var nisi e ven ;
 Petra ho lamo a anquen ?
 Nemet beguicq eur spilhen.

Eur char^{er}ter, en eur greyen
 Pe scoliet en eur voull^{er}ten ;
 Gat petra en em sicouro
 Na gat petra ec'h avanso
 Hac e gueseq, hac e oenn ?
 Nemet gat becq eur spilhen.

Deac'h e velis eur buguel
 O clasq chocat biguerniel :
 Paotricq, dell ; qemer eur spilhen
 Ha goude-ze gra evellen.
 Holla ! e me ar paot laouen,
 Vive beguicq ho spilhen !

Na glasqit qet taboulinou
 Da sevel paotredigou,
 Na da sevel scolaerien ;
 Chetu amâ ar guir voyen ;
 Plantit sioul en ho fesqen
 Beguicq, beguicq eur spilhen.

Eun den o vont da besqeta
 A ve faë bras ganta
 Clasq eur fusuilh, pe eur sabren :
 Petra a clasco-ta va den ?
 Eur hrenvicg, pe eur guellien
 Laqet var begc eur spilhen.

Mar chom gat an dud aviziou
 Ho buez, hac ho madou,
 A guemen-ze int dleourien
 Aliez da vecg eur spilhen,
 Ha chetu amà ar breuven;
 Vive beguicg va spilhen.

En nos ataqet ty eun den,
 E qemer eur bistolen.
 Chat : stouvet e toul an oalet ;
 En distouva eta so ret :
 Bigen er meas ne da e denn
 Nemet gat begc eur spilhen.

Eur veach m'en deus gat eur spilhen
 Distouvet toul ar c'hreunnen,
 Ec'h avans hardi, hac e tenn ;.....
 Al laëron spontet en em denn :
 E vuez-ta hac e voyen
 A dle da vecg eur spilhen.

Evel-ze ne veler archer,
 Fusilher na canolier
 N'ho defe stacg gat eur chaden
 Out ho habijou eur spilhen,
 Hac un arme a gant mil den
 A c'houlén cant mil spilhen.

An nadoz a zo demesell
 Ganet a lignès huell :
 C'hoant e defe da lavaret
 E ze qar taust da Bourbonet,
 Ha gouscoude e rancq goulén
 Sicour out becq eur spilhen.

Al labourer, ar pinvidicq,
 An artisan reuzeudicq;
 Ar general er c'hombajou,
 Ar roue e pen e stadou;
 E peb afer e clasq peb den
 Tenna beguicq e spilhen.

Eur c'halvez a rayo eur c'har,
 Eur c'hillorou, un alar;
 Mæs evit ober eur spilhen
 E zeo ret caout tri zen :
 Meur a hini a zrep bara
 Ne ouzont qet an dra-mâ.

Unan a daill hed ar spilhen,
 E eun hac e c'hempen;
 Gat neud laiton en dro d'e feñ
 Eun all a ra eur gurunen;
 Eun all out eur mæn bigolen
 A lemm beguioç ar spilhen.

Evel'ze en em siyuzen
 O rima var eur spilhen;
 Becg e deus; gur e, va spilhen,
 Mæs n'e bico den birvigen;
 Vive eta evit bigen,
 Vive beguioç va spilhen!

EIN.